

DUHONT DUHONT 'AR AR MANE (Hanter Dro)

Duhont duhont 'ar ar mane, eh eus ur verjelenn
Berjelennig 'hoarn he denved e larin ur sonenn

Mabig ar roué he selaoue, hag he chelaoue mat
A dal ar fenestr* uhelan, 'oe e palest e dad

Kanet kanet berjelennig, kar me gav bra'ho ton
O na adal ma' ho klevan, rejouisa ma c'halon

O non pas sur denig yaouank, me na ganin ket ken
Kar me m'eus ur breur en armé, hag a ra din anken

Kar me m'eus ur breur en armé, 'ouian ket e zoere
Marsen e ma beu(z)et er mor, pe la(z)het en armé

Marsen e ma beu(z)et er mor, pe la(z)het en armé
Kaset e m'eus un evnig rouz da ouiet an doéré

Nijet d'ar ger an evnig rouz, doereoù mat geton
Ma breurig kaezh zo yac'h ha kreñv, heb pell 'n em gavo en dro

Penaos kanañ ar ganaouen:

Frazen A: Linenn gentañ + djé + linenn gentañ

Frazen B: Linenn gentañ + eil linenn

Orin ar ganaouenn:

Azasaet eo bet an ton gant Jorj Belz evit ar strollad kanerien « Trouzerion » evit e glotfe gant an dañs « Hanter dro », ha skrivet gentañ ar pozioù a vanke diwar-benn ur ganaouenn e galleg. Kanet eo bet war lerc'h gant Yann-Fañch Kemener. Evit Bugale Kreiz Breizh, Jean-Yves Plourin en deus adskrivet ar poz diwezhañ evit e vefe eürusoc'h ar fin evit ar vugale !

*Y-F Kemener a lar « vanestr »